

Kentskrid

Pa voe embannet gant Youenn Drezen e zanevell hir « An dour en-dro d'an Inizi » e miz Mae 1932, en doa merket dija ar vuhez sevenadurel vrezhonek dre e droidigezhioù. En ur ober seizh vloaz en doa roet d'al lennerien blaz al lennegezhioù etrebroadel : an Amerikan Hawthorne, an Iwerzhonad Synge, ar Gresian Aesc'hulos, ar Saozez Beatrix Potter, ar Spagnolad Calderòn, an Izelvroad Rotman. Gant sikour Roparz Hemon en deus digoret prenistri al lennerien vrezhonek d'ar bed holl.

Ne vanke nemet skridoù war e anv.

Embannet en doa ur gontadennig bennak, ur varzhoneg yaouankiz, netra sirius. Dalc'het e oa gant e vicher kelaouenner er gelaouenn gatolik *Le Courrier du Finistère*. E miz Genver 1931 e oa bet taolet 'maez eus ar gelaouenn dre ma oa re zieub e spered, setu eñ o pellaat diouzh Brest hag o vont da Wened da labourat evit ur gelaouenn nevez *L'Ouest-Journal*, troet eus tu ar radikaled, ha c'hoant ganti keveziñ gant an *Ouest-Éclair*.

Cheñch aer en deus graet evit brasañ mad ar brezhoneg. Skrivañ a ra ur varzhoneg hir « Kan da Gornog », awenet gant skridoù Meven Mordiern ha Frañsez Vallée, *Notennou diwar-benn ar Gelted koz* hag ar *Sketla Segobrani*, ar romant istorel deut diwar-lerc'h.

Met bed ar Gelted a-vremañ a zedenne anezhañ muioc'h. Redek bro a ra er Mor-Bihan, kejañ a ra gant bernioù pennoù nevez, Langleiz an arzour, Loeiz Herrieu ar barzh-labourer, An Diberder kelaouenner, Robert Damilot livour e Gwened.

Diouzh un tu all en em gav e-unan e Gwened. E vignon bras Jakez Riou a zo o paouez dimeziñ d'un dimezell Griffon eus Douarnenez, merc'h ur marc'hadour gwin.

Paotr-yaouank kozh eo, mont a ra war e dri bloaz ha tregont. Met n'eo ket dimezet gant ar brezhoneg anezhañ e-giz Roparz Hemon, chomet e Brest. Setu ma kaver anezhañ o c'haloupat bro, o kemer notennoù war brezhoneg Gwened, o liammañ darempredoù gant tud nevez e-giz ar saver-istr Gestalen er Bonoù. Gwelet a reer anezhañ er Gerveur, e Groe, e Sarzhav, e ledenez Gwenrann, bourrañ a ra en e endro nevez a zegas soñj dezhañ eus e varadoz bigoudenn.

Kejañ a ra gant e wreg e Gwened, ur Vreizhuheladez deut da zerc'hel ur stal perukennerezh e kêr Gwened. Amourous eo an den pa skriv e zanevell.

D'ar mare-se e krog ar c'henlabour gant René-Yves Creston, ar mignon bras, kengrouer ar *Seiz Breur*. Gantañ e sav al levr kaer *Kan da Gornog*, gantañ ivez e sav an ti-embann *Skrid ha Skeudenn* evit gwellaat an embann brezhonek ha dreist-holl lakaat keñver-ha-keñver al labour skrivañ hag al labour skeudennaouiñ.


Diwar-se e teu er-maez *An dour en-dro d'an inizi*. Istor ur garantez etre ur c'hizellour paour hag ur plac'h pinvidik.

N'eus ket da glask pemp troad d'ar maout : anvet eo ar plac'h « Anna » e-giz c'hoar vihan Youenn Drezen, an hini a gare ar muiañ, aet da Anaon e 1930.

Merc'h ur marc'hadour pesked eus Douarnenez eo ar vaouez yaouank en danevell. Kemeret en doa da batrom moarvat tud en

doa bet tro da zaremprediñ e Douarnenez o vont gant e vignon Jakez da welet Marguerite Griffon.

Eus ar gizellerien koad, n'en doa nemet dibab e-touez e vignoned eus ar *Seiz Breur*.



Met ar pezh a gont eo an nevezinti a-grenn a zegas ar romantig d'al lennegezh vrezhonek. Dizonet eo nevez zo eus pouez an Iliz. Setu ne vo tamm spered relijiel ebet en danevell. C'hoari a ra Drezen gant ar c'hoant amouros a lak an daou zen yaouank da dostaat betek bouchañ an eil d'egile. Ar wech kentañ el lennegezh vrezhonek e lakaer ar gaoz war zarempredoù reizhel etre daou zen yaouank a-raok an dimeziñ, biskoazh kemend-all !

Met mont a ra pelloc'h Drezen gant tudenn Anna Bodri. Mat eo da gas karr, butuniñ a ra sigaretennoù, mont-dont a ra 'lec'h m'he deus c'hoant gant he c'harr-dre-dan Hotchkiss, ur plac'h modern eo, kant lev eus doare merc'hed ar gevredigezh hengounel war ar maez.

Diouzh un tu all Maheo ar c'hizeller n'eo ket e awen sachet gant "botrelajoù" anezhañ. Mennet eo da labourat gant ur spered adneveziñ an arz breton, da lâret eo labourat gant spered ar *Seiz Breur*. Adkavout a raimp pelloc'h tudenn an arzour e *Itron Varia Garmez*.

Pa oa bet embannet evit ar wech kentañ e *Gwalarn*, Drezen 'oa deuet a-benn da lakaat skeudennaouiñ ar golo gant Langleiz. Deuet

oa divalav a-walc’h gant *Gwalarn*, n’he doa ket ar gelaouenn kalz arc’hant da sevel levrioù kaer d’ar mare-se.

Setu perak en doa bet c’hoant Drezen adembann an danevell e-pad ar brezel gant *Skrid ha Skeudenn*.

Soñj en doa eus e vignon Robert Damilot (1889-1976) en doa anavezet mat e Gwened. Hemañ a oa perc’henn ar sinema Eden hag en doa savet a-nevez mañsonerezh ar sal o roiñ dezhi ul liv *art-deco*. Robert Damilot en doa labouret e Pariz gant Modigliani hag Utrillo a-raok ar brezel pevarzek ha deut ’oa da vezañ mignon bras gant Dunoyer de Segonzac. En em staliet e oa e Gwened er bloavezhioù ugent hag anavezet eo dreist-holl evit e daolennoù war vuhez ar vartoloded er Mor-Bihan.

Chomet eo e dielloù Drezen maketenn al levr kaer bet ijinet gant an daou zen ha chomet diembann dre ziouer a baper kaer e-pad ar brezel.

N’eo ket chomet ar skrid da louediñ e grignol al lennegezh vrezhonek rak adembannet eo bet gant *Al Liamm* e 1972, dres ar bloavezh ma lâre Youenn Drezen Kenavo deomp, hanter-kant vloaz zo.

Gant an embannadur-mañ e teu er goulou ur raktres a ya tre gant spered Drezen en deus bet c’hoant atav roiñ d’al lennegezh vrezhonek levrioù a-live gant an embannadurioù all er bed. Ra vourro Yann vrezhoneger gant ar skrid-mañ ha kement den kar-e-vro gant kaerder al levr skeudennaouet.

Bernezh Rouz

YOUENN DREZEN

AN DOUR EN-DRO
D'AN INIZI



SKEUDENNOU GANT R.DAMILOT

SKRID HA SKEUDENN

GWENED

1912

O KLASK GWERZA E WRES,
EVIT PEMZEK GWENNED, MARIANNA,
EVIT PEMZEK GWENNED...

—KAN 'TA, TE IVEZ, EMEZI, EUR
WECH, O REI D'IN EUR VOËSADENN
EM SKOAZ.

HA MAR KAREZ, IRIBE, E
LAVARIN D'IT : NEC'HET E
GAN, ABAGE AN DAOU
VIZ M'HEC'H ANAVEZEN,
GANT AN DOARE SKIL-
BADTR A OA E ANO
ANNA BODRI, NEC'HET
HA FEUKET EUN
DISTERA.

DRE MA 'Z
AEMP E-BIOU DA
VOURC'H BADEN
HAG E LIORZADOU
GWEZ KIGNEZ,
GANT DIOU GOU-
KOUG O 'N EM
RESPONT EUS EUR
PENN D'AR VOURC'H D'AR
PENN ALL, E KLASKEN LAKAAT URZ EM PREDERIOU.

AN DOUARNENEZADEZ-SE, C'HOARIEREZ HA C'HOARZEREZ, BEO
HA LAMENNEK, N'OAN KET, NANN A-DRA-SUR, N'OAN KET EVIT O.
BER EUR SKANBENN ANEZI. RE EN HOLL, EVELKENT, E OA A
GEMM ETREZI HAG AR MERCHED YAOUANK AM BOA DAREM-
PREDET BETEK NEUZE, DIMEZELLED GWENED, DEREAT HA
GWENN O LIOU. Ni, GWENEDIZ, A ZO GALLOUDUS HON
TRIVLIADOU; NE GAVOMP KET REIZ, AVAT, O DISKOUEZ
WAR HON DREMMOU NA GANT GERIOU. ME VA-UNAN O OA
TANO VA FIZIAÑS EN EUR VAQUEZ RE ZIEVB HE DOAREOU.
HOUMAN, ANAT D'AN HOLL, A DARZE GANT EUR JOA HAR-
DIS. SELLOUT A RAE EEUN EZ TOUALAGAD, HAG HE
ZEOD A OA KEL LEMM HAG HE SPERED.




AN TU DEHOV, E DREID EN DOUR, EMAN AR BONO, PORZIG GWENN AN HA-
DERIEN ISTR.

KENKIZ ANNA BODRI ? EUR MANER KLUDET DRES E BEG-DOUAR
KEMBER AN DIOU STÊR. DUZ E BRENISTRI, EZ ARVESTER, ETRE
POSTROU HIR, MISTR HA DU, HA DINIVERUS AR GWEZ PIN, AL
LANO O PIGNAT E-PAD C'HOUEC'H EUR O C'HOLEI GOUSTAD ALLEC
HIDEGOU, HAG AR PARKADOU ISTR HAG AR C'HERREG GANT O G-
WISKADOU BEZIN ; HAG AN TRE O TISKENN E-PAD C'HOUECH EUR
ALL ; AL LISTRI O RUZA INGAL WAR VELEZOUR AN DOUR E
GWASKED AN TORGENNOU GWEZENNEK.

DIABARZ AR C'HENKIZ, KEMPENNET GANT MONDIANED
DOUGET DA VRO O C'HAVELL. LAKAET E VEZES DA AZEZA
WAR DORCHENNOU BLOT, BROUDET WARNO GANT SEIZ RUZ,
AN AEROVANT KELTIK. AN ARREBURI A DA E DERO FETIS,
HAG AOZET HERVEZ SKOUERIOU ARZOURIEN YAOUANKA HAG





Tevel
a reas war-dro
kreiz an deiz an avel gor
a c'hwezhe diouzh an traoñ. Ar
wrez a zeve. Morzet edo Altsasu
dindan an heol. Difiñv-meurbet ar
gwez fiez ha kasia hag ar palmezennoù.
N'oa nemedon er straed, etre an tiez liv an dienn.
Ar pichoned a oa kousket war vord an toennoù teol
ruz. Ar blomenn-dour, hec'h-unan, 'kreiz al leurgêr
tommheoliet ha didud, a oa moredet hag a gouezhe gant ur fistilh
diegus en he foullig marmor.

Sklintinañ a rae ur sonskriverez en *Alava-Hotel*. Mouezh ur
vaouez. Treiñ a ris eno.

*War a glevan ez eus, en tu all d'ar mor,
Ur gêr a zo bourrus bevañ enni...*

Jozefina Baker, Venus du ar C'hallaoued, a c'hrougouse he hiraezh d'ar gêr hoalus, gant he doare-distagañ bugel ha gadal.

Teñval ar bar, ha distan, un dudi. Everien war gorf o roched, digomz. Merzout a ris ouzh un daol gelc'hiek, prennet e ziweuz war e sigaretenn o vogediñ, va c'heneil Maheo. Ur Breizhad. Un tasad kafe du en doa dirazañ : ne golle ket boazioù e vro. Selaou a rae, eñ ivez, ar vouezh, klouar ha flour, o tiskanañ :

Div garantez am eus,

Va bro ha Pariz...

— Adio, Maheo ! oc'h ober netra ?

— Azez aze, a respontas, ha kemer un dra bennak. Te a zo re domm da vro. N'emaon ket mat amañ.

Ha ne vousec'hoarzhe ket o tistagañ e gomzoù.

— Dija ? Ne vourrez ket pell er memes lec'h !

— Brav eo da glevout : *Me 'm eus div garantez*. Ur barrad glav, avat, a rafe din muioc'h a blijadur.

Maheo a daolas trumm e sigaretenn dindan e gador aozilh, hag a c'halvas ar vatezh.

— Lakait ar bladenn en-dro, Maitia, ha degasit ur banne kafe ivez da Iribe... Eo, eo ! n'eus ket d'ar rouzig da zerc'hel dihun. Amañ eo kousket ingal an dud.

Grougousat a rae ar sonskriverez adarre. Treiñ a reas Maheo ouzhin.

— Un estlamm, emezañ, an niver eñvoriou a c'hell diwanañ e spered ur c'hristen diwar un ton hag ur son !

Harpañ 'reas e benn, a-c'hwen, ouzh ar speurenn, hag e sell a baras, hep en gwelout, e-pad ur reuziad hir, war ur mell kitar orañjez, a-ispilh nepell diouzh ar skritell skeudennet a embanne redadegoù-tirvi Iruña.